

AVEL HON LENNEGEZH O C’HWEZHAÑ (58)

« Lamm ha stroñs ha lusk ha stirlink an houarnaj hag ar rodoù, leñv ar c’hoadañ, taolioù-skourjez ar gouleier er broioù bras dianav evel un aveler o tigeriñ hag o serriñ en deñvalijenn du dall, dir an div roudenn hent-houarn evel an tonkadur dindanon, hag ar c’housked o tont, o tont, hag o tec’hout bepred gant c’hwezh ar peg hag ar blev, heug ha doñjer ha pep nervenn antellet betek regiñ, hag ar gleuzeur-se en trepas, didruez em lagad. Beaj-noz : anhun. »

An neb a oar eus oberenn Roparz Hemon, hon Roparz, a ouvez mat penaos zo un toullad skridoù gantañ da zizoleiñ en ur dreiñ pajennoù ha pajennoù ar gelaouenn *Gwalarn*. Ha me zo eus ar re-seoù, anat deoc’h. Ingal e kavan skridoù da lenn, da adlenn, da beurlenn.

Hon Roparz e oa al lennegezh evitañ evel ur park da arat ha da adarat, da beurarar zoken. N’eo ket souezh eta kavout gantañ skridoù o respont an eil d’egile evel un doare kan ha diskan. Kan ha diskan lec’h ma kej ar varzhoniezh, ar gomz-plaen, an trivliadoù, ar souezhadennoù, ar goanag hag an dic’hoanag, an hunvreoù hag ar c’hoantoù. Goulenn digant ar spered, ar galon, met ivez digant ar c’horf. Korf un den en e gevredigezh liesstumm, degemerus pe dizegemerus, hervez...

An *incipit* am eus roet amañ da gregiñ ganti zo un heklek anezhañ en un danevell skrivet diwezhatoc’h :

« Ur from espar a grog en den douget a-hed div roudenn dir e sioulded ar beuznoz, pa n’eus ket c’hoazh a c’houleier, ha nikun en e gichen. From ha damspont. Skeudenn wirion an tonkadur, difonn ha prim, ar varus ha dibleg. Badet ar c’hleved gant taboulinadeg ar rodoù, teoget ar sell gant kornigelladeg ar maez, e teuz ar gwirvoud en hunvre, ha faltazi dic’hiz a vesk e prederennoù reizhek ar skiant. Bez’ ez intr er spered neuze pep tra diwirheñvel evel ma ra er c’housked. Aet da get meizad an amzer hag an ec’honder. Digor an ene da santadennoù link ha merzhadennoù tanav a vanfe kuzhet pe a vefe argaset raktal pa bar heol ar poell en e splannañ. Un alberz a baker neuze eus an darvoudoù o tont. Ha gouzout a raen d’an ampoent e vijent darvoudoù souezhus ha melkonius, ranngalonus din ha d’an dud a gejjen ganto dizale. »

Anhun, hunvre. Gerioù kevatal en degouezhioù zo. Ar veaj-noz eo an hunvre. A-wezhioù e pad ar veaj evel ar vuhez penn-da-benn... Diouzh trivliadaoù hon Roparz e santer pouez ar beajiñ : an hent ergerzhet a c’hall bezañ pouezusoc’h evit ar gêr, pe ar vro gortozet... E se emañ arz hon Roparz kendisplegañ galloud an daskounañ (an evokasion mar karit) ha nerzh ar weledigezh. Daskounañ evit gwelet, met ivez evit klevet, son ha frond.

Evit gwir emañ hon Roparz o c’hoari gant ar *stream of conciousness*, froud an emskiant, pe ur breur dezhañ marteze. An tren, e rodoù war an hent dir, ar veaj-noz, kement elfenn evit kas e spered war-raok. Treuziñ gouel an hunvre evit skoulmañ gant gwirvoud ur pemdez dic’hoantaet, pe dic’hortoz da vihanañ...

Hunvre. Dont a ra da soñj din ur barzhoneg berr gant hon Roparz : *An hunvre gozh...*

Hunvreet en deus e vije gouest  
Da sevel dit ur c’hastell,  
Gant mein ha raz, da badout pell,  
Ha dimp-ni, tud, un arvest !

Hag echu eo e zevezh berr,  
Ha strewet eo, dic’houdor,  
’Vel bili lufur war ribl ar mor,  
Teñzor e galon dener.

An hunvre diwar an anhun ? Marteze. Ha goude emañ an dihun. Gantañ keuz, kasoni, breskter...  
Kabac'h ar spered :

« Keuz d'ar gêriadenn, d'an dud ha d'ar mor. Keuz d'an eñvor a dec'h hag a sil hag a bleg hag a dremen, skiltr ha c'hoarzhus evel dour. Keuz d'an nozvezh aet da get, ha morzadur, ha kasoni ouzh an dremmoù hag ar maezioù estren o spurmantañ e latarenn ar gouloù-deiz. Breskter ar spered, krouer kabac'h ha seizet.

Gant al lusenn war ar werenn e koazh tiez va hunvre. Diwezh ur bed. Paotr ar bilhedoù o youc'hal evel Ael ar Varn Diwezhañ. »

Nerzh ha modernelezh skritur Roparz Hemon zo en seurt skridoù. *Anhun* zo sklaer, a-raok pep tra, an troc'h lakaet etre ar pezh a dremene da lennegezh a-raok *Gwalarn* hag ar pezh a rank bezañ diazez al lennegezh vodern. Ha se hep ankouaat an awen pobl, ken kreñv, ken pouezus en hon sevenadur.

*Anhun*, zo en tu all d'ur veaj-noz. Emañ o kas ac'hanomp war-du meur a zremmwel skedus...

Hep *Anhun*, n'eo ket lâret en dije gallet Roparz Hemon boulc'hañ *Beajour ar goañv*, evel-se... Penaos e teu ar skridoù hag o awen d'ar skrivagnerien. Emskiant-diemskiant. Ne vern. Ha ne vern pal disklêriet ar beajoù-se, rak, ni, herie, e ouzomp re vat e kasont ac'hanomp gante war blanedenn an dud o deus frankiz d'ober gant o yezh, da brederiañ dre o yezh, da grouiñ abalamour d'o yezh. Mont da heul hon freder hag hon frederi...

Herve Bihan

Levrlennadur

Roparz Hemon, *Anhun*, Gwalarn, Niv. 9, Nevezamzer 1927, pp. 34-39.

Roparz Hemon, *Beajour ar goañv* in War ribl an hent, Al Liamm, 1971. [an danevell zo bet embannet war Walarn da gentañ en 1944]

Roparz Hemon, *An hunvre gozh*, Barzhonegoù, Al Liamm, 1991, p. 90.